

## KIS-467 – Gl. *appareance, apparaître*

(GE – 04 11 94 – 17 07 96)

Emaomp amañ war un dachenn gemplezh ma vez o taremouezh e meur a hent an arverioù boutin, skiantel ha prederel. A-du-rall ez eo eno ken puilh loazioù ar brezhoneg ma rankimp alies tremen gant divrañ an diskoulmoù.

Tennañ a ra an termenou-mañ o ster eus ar gevenebadenn etre “ pezh a zo ” ha “ pezh a hañval bezañ ”, etre “ da welout ” ha “ da gavout ”. Loc'homp enta diwar ar “ gwelout ” pe resisoc'h diwar ar *merzhout* : darvoudoù ar *merzhout* zo kiriek kent pep tra d'an diforc'hioù etre “ bout ” ha “ hañvalout ”. Da gentañ e kemerimp alberz eus labour ar brederourion war ar *merzhout*. En un eil kevrenn e raimp ur brassell war an *derc'hennañ* e kement ma'z eo ur “ reiñ da welout ” hag an arverioù diseurt a reer eus hemañ er gedvuhez, en imbourc'h, er greanterezh, er brezel...

### AR MERZHOUT – DARVOUDOU HA LUNIAD

#### I. – AR MERZHOUT EVEL KANTOUEZAÑ

Anv a reer er rann-mañ eus ar *merzhout* evel hent da anaout an traoù. Div isrann a raimp, hervez ma seller ouzh ar c'hantouezañ boutin pe ar c'hantouezañ skiantel.

##### I 1. – AR MERZHOUT EVEL KANTOUEZAÑ BOUTIN

En askont eus ar pellder, an amc'houlou pe eus va isstiwel e'm eus poan o c'houzout petra eo al ledenn lintrus a spurmantan en draonienn : hag ur stêr eo pe feilhennoù mezell ? Va merzhout ned a ket betek an dec'havael dreist arvar eus ar beziad, chom a ra hanter hent, e par ur marteze, ur **spurmant**, un **hañvalad** stêr. Mar gran anv eus ar pezh a verzhan e komzin eus “ar stêr e **hañval** bezañ, ar stêr **hañvalat**”. Un deskivadur anadennoniel eus an degouezh a gaver e La-01, pp. 70-71.

## I 2. – AR MERZHOUT EVEL KANTOUEZAÑ SKIANTEL

Da welout (dre ur c'hantouezañ boutin), e kreder e sav hag e tiskenn an Heol en oabl pa ouzer (dre ar c'hantouezañ skiantel) ez eo an Douar a zo o c'hwelañ. An hañvalad a seurt-mañ a anver ivez ur **van**. Gant an Heol ez eus ul loc'h **manat** (*anat* met n'eo ket *gwir*) pe c'hoazh ur **manloc'h**. E kentelioù Fizik SADED e kaver keal eus **manbouez** (Gl. *poids apparent*) ur c'horf soubet en ul liñvenn (Fiz-16, p. 3). A-gevenep da **man(-)**, **manat** emañ **dien(-)** : “**Dienloc'h** an Douar”.

## II. – AR MERZHOUT ER BREDEROURIEZH

E-maez prepoz an notenn-mañ emañ istor La. *perceptio*, Gl.Sz. *perception* abaoe BACON ha DESCARTES ; merkomp hepken ez eo dedroet ster an termen a-dreuz preder LOCKE, LEIBNIZ, HUME, KANT, BRENTANO, HUSSERL, MERLEAU-PONTY hag an anadennoniourion betek talvout hiziv kement ha “dec'havael kantouezat ar werc'helezh ved”.

### II 1. – ANADENNONIEZH AN ERGORAÑ

Endra bled ar Ouezoniezh gant an anadennoù merzhet er bed e fell d'an Anadennoniezh studiañ anadennoù ar merzhout end-eeun. Kentradet e voe an diskiblezh nevez gant HUSSERL (1859-1938) er rummad kentelioù a roas e 1907 e Göttingen. En darempred etre ar gouzrec'h hag an dra er bed ez eus daou argerzh : a-berzh an dra un **anadiñ** (Al. *Erscheinung*, Gl. *apparition*), a-berzh ar gouzrec'h ur *reiñ ster* (Al. *Sinngebung*, Gl. *donation de sens*). Deskrivadur luniad ar merzhout gant HUSSERL a savel un trede elfenn etre daou vlein an emouezañ hag ar bed : er merzhout e kemer an emouezañ furm an *ergorañ* (Al. *Noesis*, Gl. *noèse*) a zo dezhañ da gendavead (Al. *Korrelat*) an *ergorad* (Al. *Noema*, Gl. *noème*) enmanus, meni ketal a'r gouzrec'h arloet ouzh an dra, hemañ o kemer furm ar *gourzhergor* (Al. *Gegenstand*, Gl. *objet*) trehontus, amparet a-dreuz d'ul lerc'hiad *diskeudoù* (Al. *Abschattungen*, Gl. *esquisses*), sl. La-01, pp. 63 hh. ; La-08, p. 516 ; KIS-364, La-09, p. 244. HUSSERL a geveneb an *anadiñ*, difluk an dra “kig hag eskern”, an **anadenn** (Al. *Erscheinung*, *Phänomen*, Gl. *phénomène*), frouezh ar merzhout dien, ouzh an **asvan** (*spes, spurmant*, Al. *Schein*, Gl. *simulacre*), touell ar merzhout gant pe hep rat d'ar merzhiad.

### II 2. – ANADENNONIEZH AN NEUZIAÑ

Ur redenn andoniet e HUSSERL ha HEIDEGGER he deus lakaet da zispakañ ur brederouriezh a'r *bezus* (Al. *Vermögen*, Gl. *possible*) : “Merzhout un dra zo *neuziañ* (Gl. *figurer*) an dra-se evel pa vije roet d'hon emouezañ en un taol (ent kevadegel) pa zeu erouez dimp en devoud dre un treadegad *diskeudoù* (Al. *Abschattungen*) ha diarselloù : neuziañ a reomp anien ezvezant an dra evel pa vije bezant” (R. KEARNEY, *Poétique du possible*, in La-08, p. 516). An *neuziañ* (Gl. *figuration*) n'eo ket dec'havael an dra evel **bezant** (Gl. *présent*) met evel **bezus** (Gl. *possible*). An *neuziañ* (Al. *Darstellung*), dre gediañ an *diskeudoù*, eo a zifourk er *merzhout*. An droerion a lak a-wechoù a-dal da Al. *Abschattungen* ar Gl. *esquisses et apparences* — an termen-mañ diwezhañ intentet evel “ar pezh a zeu war wel eus an dra merzhout, ar pezh a zo *anat* e-ser ar merzhout” ; Br. **anadoù** a ve kendeç'heriad dik an termen gallek.

### II 3. – “ANADENNONIEZH ” PEIRCE : AN EROUEZENNONIEZH

Charles PEIRCE (1839-1914), kempredad amerikan da HUSSERL manet dianav dezhañ, a ziazezas ivez ur *Phenomenology* a anvas a eil lañs *Phaneroscopy*. “Ar ger *fanerovn* zo tost da vat ar bomm eeunañ e gresianeg da lavarout *erzerc'h* (Sz. *manifest*). [...] Hep mar ebet e talvez *fanerov~* da gentañ kement ha “lakaet e goulou, digor penn da benn d'an ensell kevredin” ” (MS<sup>1</sup> 337:4-5). Dre « phaneron » ez intent Peirce “ kement a zo bezant d'ar spered e forzh pe ster pe e forzh pe zoare hep teurel pled hag un devoud eo pe ur frouezh d'an dec'hmegeañ ” (CP 8.213 in *ÉP*, meneget gant N. HOUSER p. 88). Ar *phaneron* zo dres ar pezh a lavarer *erouez* e brezhoneg. En e notenn da heul e skriv N. HOUSER : “Ar phanera zo *erouez d'ar speredoù* [ *présents aux esprits* ], bez' ez int kement a emgav *dirak* ar speredoù, met n'emaint ket da vat *e-barzh* ar speredoù” (*ÉP* id., p. 89). N'eo ket amañ al lec'h da geñveriañ *Phänomenologie* HUSSERL gant *phaneroscopy* PEIRCE — merkomp hepken e oa amkan an Amerikan reiñ ur sol boutin d'an holl imbourc'hioù ha pa vent hini an arzour, hini ar skiantour pe hini ar jedoniour. An amkan a roan-me d'an notenn-mañ o c'houzout ervat n'en tizho ket pa chomo e par an divrazañ eo renabliñ avataroù an *hañvalout* el lavar boutin, skiantel ha prederel. Evit a sell lavar ar preder n'on ket evit reiñ ouzhpenn alberzioù. E degouezh PIERCE e vo a-walc'h gouzout ez eo an **erouezenn** (Sz. *phaneron*) dodenn greiz e imbourc'h hag ez eo Br. *erouezennoniezh* kevatal ar Sz. *phaneroscopy*.

---

<sup>1</sup> Ar menegoù eus skridoù PIERCE a dennan eus *Études phénoménologiques* (*ÉP*) V 9-10 1989. MS = dornskridoù korrfilemet diembann ; CP = *Collected Papers* emb. gant Harvard University Press.

#### II 4. – PREDEROURIEZH AN NAOUIÑ

En ur rageneb da zurch'hadur PEIRCE emañ hini LEVINAS (1905-1995), prederour europat yuzev gallek a zegemeras e stummadur kentañ digant HUSSERL ha HEIDEGGER, a zigreizas avat e breder enep hennezh diouzh an *emouezañ* ha pa ve trehontel, enep hemañ diouzh ar *boud* — o tisteurel ar voudoniouriezh en he holl stummoù evel an damant d'ar gwrizeniñ hag ar gravez lec'helour. Doues ha kemplezh eo dezeverezh LEVINAS, maget ma vez gant an Torah hag an Talmud. Mar en menegan amañ ez eo pa zeu gantañ alies an termenoù *apparence*, *apparaître* ha henstumm ar verb-mañ, *apparaître*. Ur standilhon ne roin ken eus e skridoù ma kaver an termenoù-se : “ Perak ez eus argraf en diskelañ ? Respont a c'hallfed da gentañ penn evel henn : argraf ez eus dre ma'z eus holc'h ha dre ma'z eo naoudigezh ar bout war un dro e c'hallusted da anadiñ ha dre ma vez an anadiñ o kuzhat ar bout e-ser e zioueliañ end-eeun ha dre ma tle an holc'h d'ar wirionez digrakañ ar bout diouzh an hañvalout ; pe — hogen hag an un dra n'eo ket ? — ez eus argraf dre ma 'z eo pep erzerc'had darnel ha dre se hañvalat, pa na vez ket tamm ar wirionez hep ma ve darallet ha, dre se, pa'z eus anezhi un argammediñ, gwereet ma vez e lies pred hag o chom argrafek e pep hini<sup>1</sup>. ” Evit LEVINAS evel evit HEIDEGGER emañ goueliet ar boud/t ha kuzhet e chom e-ser e zioueliañ end-eeun. Gant LEVINAS avat n'emañ ket ar wirionez e-keñver ar bout met e-keñver un “ tu-hont d'ar bout ” ez eo an Hentez.

#### AN DERC'HENNAÑ

Derc'hennañ zo reiñ da zec'havael A dre wereañ B, eleze tennañ korvo eus ar forc'hellegezh enlenat da neuz ar beziadoù, a lavar ar c'hoazh *hañvalusted* ar beziadoù : an hevelep  $\infty$  a dalvezo "kroazhent" war ar banell hag "arabat" war ar lun ar ferñ (diwar vont, merkomp penaos emañ enlenat ar goueliadur d'an anadiñ). Daou vlein a

---

<sup>1</sup> “ Pourquoi il y a question dans l'exhibition ? On pourrait dès l'abord y répondre ainsi : il y a question, parce qu'il y a recherche et parce que l'apparaître de l'être est aussi la possibilité de son apparence et que l'apparence dissimule l'être dans son dévoilement même et que la recherche de la vérité doit arracher l'être au paraître ; ou bien — mais n'est-ce pas la même chose ? — il y a question parce que toute manifestation est partielle et en cela apparente, alors que la vérité ne se fractionne pas sans s'altérer et que, par conséquent, elle est progression et s'expose en plusieurs temps restant problématique en chacun. ” LEVINAS, *Autrement qu'être ou au-delà de l'essence* 1974 (L. de poche 1990, pp. 44-45). War-benn skañvaat an destenn e tavean d'an Aznotenn dibenn ma strivan da sklaeriañ luniadur ha kemeradur an termenoù kalvezel arveret en arroud-mañ.

zigejer enta e-ser an *derc'hennañ* : an *dehaezer* (an hini o *terc'hennañ*), an *dehaezadour* (an hini o *tec'havael* an *derc'hennad*). Diwar hemañ diwezhañ e loc'hin.

### I. – DERC'HENNAÑ HA DEHAEZADOUR

Un tamm kartoñs bosek ha livet a zeu war arbenn din — *derc'henn* un dremm a welan raktal, ur gweenn eo : un dremm *war van*, un **arvan** dremm. A se e ve *arvan* heñvelster da *derc'henn* ? Kempleshoc'h eo :

~ mar gwelan **H** war ur banell straed e ouzon ez eus un ospital nepell, ur c'hendivizad eo ; mar lakaer dindan va daoulagad ur bomm arabeg ne intentan grik, dic'houzvez ma 'z on eus ar c'hendivizad a zo alc'houez ar yezh ; notomp enta emañ an arvan *kendivizat* a-geñver gant ar *ster*.

~ sellomp bremañ ouzh an tun brezel ez eo an *darguzhañ*, reiñ da skouer hañvalad ar c'hlasvez d'ur bagad milourion : a natur gant an *darguzhañ* emañ an *darneuziañ* a zo un arc'hwel eus Loened 'zo, e rezh an *arundelviñ* etre “ tunioù ” all, da skouer pa wisk ar Fasmed neuz ar briñsad (sl. KIS-366, La-09, p. 167) ; ne c'hell ket bezañ anv a gendivizad, emañ an arvan amañ a-geñver gant an *eul* : drezañ e tapomp keal eus un *dareulañ* hollek ez eo an *dareulañ* lavarel ur spesad anezhañ (en hevelep doare ma'z eo an arouez ur spesad eus an arhent).

Lakaet er-maez an troioù evel an *darguzhañ* ma vez aozet an arvan evit touellañ, e oar an *dehaezadour* peurliesañ dinoiñ forc'hellegezh an neuzioù ha *derc'hel* disparti an arvan diouzh ar *gwerc'hennoù* en doug. Ned eo ket aes bepred. An arvez eulel emaoamp o paouez deskrivañ d'an arvan a ro da gompren perak e fromer dirak ur film pe ur pezh c'hoari : houl an eul o tont a zonoc'h a freuz an disparti hag an arvan a ya d'ar *werc'helezh* nemeti.

### II. – DERC'HENNAÑ HA DEHAEZER

Lavarout ez eo gweet buhez mab den gant an arouezioù hag an *derc'hennoù* zo kement ha lavarout e vev en ur bed a arvanoù.

Aze emañ diac'hinad ar Ouezoniezh : o klask diraez ar *werc'helezh* dindan an arvanoù e tegouezh gant un trevnad arvanoù nevez n'int trec'h d'ar re gent nemet dre vezañ ergeñverusoc'h egeto.

Evit an Arz a vuk d'ur *werc'helezh* nad eo ket *dindan* met *dreist* an arvanoù boas (alese an adanv *surrealour* arouezus d'e anien bepred ha pa skritellas ur redenn

dispredet hiziv). Lusk an Arz eo an *handerc'hañ*, kenderc'hañ arvanoù eus arvanoù. Un arvanañ en eil, en trede, er pevare derez eo ar Sonerezh, al Livouriezh, al Lennegezh, ar C'hoariva, ar Filmoù.

Ne c'hallfe ket an notenn-mañ, ha hi krennek, tremen hebiou d'un arver arbennik ha paot ouzh paot a vez graet eus an arvanoù en obererezhioù arnevez ; fellout a ra din komz eus an **darvanañ**, eleze an aozañ trevnadoù jedoniell o trevezañ monedigezh ur reizhiad werc'hel kemplezh (alvezel, bevedel, armerzhel, h.a., sl. GSTL. ¶ 3910). Ur skourr diorreet eus an darvanerezh eo an *darvan traelezh* : stalañ a reer gweled, stekiñ ha loc'hañ (kefourzhañ, sl. KIS-452, La-10, p. 195) ar gouzrec'h ouzh un ijinenn o pourchas dezhañ arvanoù kevanlen eus ur werc'helezh ha war un dro an araez da wezhiañ warno. Hevelep kalvezerezh a denn korvo eus arvez eulel an dec'havael arvanoù a raemp anv anezhañ diaraok : steuziañ a ra didenn an disparti etre gwerc'helezh ha darvanelezh ha houmañ a ya dillo d'ar werc'helezh nemeti. Eno emañ hep mar arbenn ar berzh a reas diouzhtu an termenou emzislavarus Sz. *virtual reality*, Gl. *réalité virtuelle*.

### AZNOTENN

Ne stagan ket ur gerva divyezhek d'an Notenn-mañ, peogwir e kaver an elfennoù anezhañ endeo e korf an destenn ha dreist-holl peogwir e ve touellus alies lakaat keñver ha keñver ur ger brezhonek hag ur ger gallek eus an hevelep sterva met re zisheñvel o erdal hag o ental. Un abeg all eo, e welet hon eus, fiñvusted ar c'hemeradurioù etre un aozer hag unan all — soñjal a ran e Gl. *apparaître, apparence*. Un addispleg ne rin ken enta, gant an ersell brasañ, war un nebeut termenou arveret p. 238 pergen.

Br. **argraf** g. a lunian a-dal da Gl. *question*, Al. *Frage* : "*kraf* emeur warnañ". An adanv Br. **argrafek** zo kevatal da Gl. *problématique* e reoù eus e generadurioù.

Br. **arvan** g. **-où** (dibabet 'm eus e ober gourel evel Br. *asvan*, Kn. *man*) "ar pezh a zec'havaeler, o kennotañ bezañs ur werc'helezh all a-dreñv, heglot pe anheglot" (Gl. *apparence*). Lodek eo an termen er steudad :

Br. **neuz** b. **-ioù** "ar pezh a zec'havaeler eus an traoù", erdalekañ ha neptuekañ termen eus ar steudad ; sl. *neuziañ* en e arver arbennik dindan **II2**, p. 237.

Br. **anad** g. **-où**, keverdal d'an termen diaraok, o kennotañ an *anadiñ* (Al. *erscheinen, Erscheinung*, Gl. *apparition*) er ster anadennoniel koulz hag an *anadenn* (Al. *Erscheinung, Phänomen*, Gl. *phénomène*).

Br. **asvan** g. -où (betek gouzout e talc'han ar stumm embannet gant HEMON ; VALLEE a skriv *ezvan* a c'hallfe bezañ ur furm all) "arvan touellus".

Br. **darvan** g. -où "arvan o savelañ ur werc'helezh a c'hiz nevez (jedoniell, stlennegel) o terc'hennañ ar werc'helezh ved war an amkan emellout enni".

Br. **boud/t.** HEIDEGGER a lak kemm etre Al. *Sein* ha *Seiendes*, Gl. (*l'être* ha (*l'étant* ; ne ra LEVINAS nemet dervaat : “ le terme *essence* y [en e levr] exprime *l'être* différent de *l'étant*, le *Sein* allemand distinct du *Seiendes*, l'*esse* latin distinct de l'*ens* scholastique” (*Autrement qu'être...*, p. 9). Degas a ra ur c'hemm ouzhpenn : “Petra a emziskouez dindan an anv *boud* ? An kez anv ned eo ket diforc'hell. Hag un anv eo pe ur verb ? Hag ar ger *boud/t* a arouez un hennad (*entité*) o *vout* (*qui est*) — derc'hel pe werc'hel — pe an *argerzh bout* (*processus d'être*) eus an kez hennad : ar *bout* (*l'essence*) ? ” (id., p. 43). E galleg e sav kudennoù na anavez nag an alamaneg pa ziforc'h *sein* ha *Sein* nag ar brezhoneg pa skriv *bout* ha *boud* (benniget ra vo reizherion 1907 !)

Br. **darallañ**, Al. (*ver*)ändern, (*Ver*)änderung, Gl. *altérer*, *altération*. Ankevazas eo an termennoù lennegel Br. *distresañ*, *disleberañ* o sammañ ur ster deveret “distreset” eus Gr. ajlloivwsi~ .

Br. **diskelañ**, kevenep da Br. *kelañ* "chom kuzh, derc'hel kuzh" (Kb. *celu* "cuddio, cadw'n ddirgel"), "emziskouez, emziskuliañ". E lakaat a ran amañ a-dal da Gl. *exhibition*, *monstration* arveret gant LEVINAS pa ra anv eus ar *boud/t* hag ar wirionez : “Ar wirionez [...] zo anezhi *diskelañ* ar *boud*. Hogen petra a *emziskouez*, dindan an anv *boud*, er wirionez ? ” (“ La vérité [...] consiste en l'*exhibition* de l'être. Mais qu'est-ce qui *se montre*, sous le nom d'être, dans la vérité ? ” id., p. 43). Nes eo an termen d'an *ajlhqeuvein* – *Entbergung* heidegerek (sl. *Vom Wesen der Wahrheit* pergen, Gl. *dévoilement*, Br. *dioueliadur*), termen a gaver ivez dindan bluenn LEVINAS — anzav a ran n'ouzon ket pe gemm zo mard eus etre kemeradurioù an daou brederour. Menegiñ ne ran ken diwar vont daou dermen eus an hevelep sterva o parzhiañ an eil el lavar boutin hag e ziskiblezhioù diseurt : Gl. *manifestation*, Br. *erzerc'hañ*, egile en Anadennoniezh hag o taveiñ da gant ar merzhout : Al. *Erscheinung*, Gl. *apparition*, Br. *anadiñ*.

Br. **holc'h** verb & g., **holc'hiñ**. Tri derez a gavan azas dispartiañ er striv da anaout : **arglask**, eleze strivañ da zaskavout ur beziad, d'ober dezhañ erouezañ (igounierezh, urzhiataerezh) ; **imbourc'hiñ**, eleze savelañ keñverioù etre ar beziadoù, anren savelennoù, oc'h argerzhañ dre ar goulakaat hag ar gwiriañ arnodel (gouezoniezh) ; **holc'hiñ**, eleze mont war-du udb. nad eo nag erouezadus na gwiriadus,

anvet gant an holc'her *anien*, *boud*, *gwirionez*, *hanvoud*, h.a., a rank kavout e gantreizh ennañ e-unan (prederouriezh).

Br. **merzhiad** g. **-ed** "neb o verzhout", Gl. *sujet de la perception*, (*sujet*) *percevant*, Sz. *percipient* (amprestet met nebeut arveret e galleg).

Br. **naouiñ** (< krBr. *gneuiff*) a zec'herian drezañ ar c'heal eztaolet gant LEVINAS dre Gl. *apparoir*, eleze donedigezh ar boud hag ar wirionez, (a-gevenep d'an *anadiñ* o kendeç'heriañ Gl. *apparence* e testenn LEVINAS, na oufe bezañ ouzhpenn c'hoari ar *c'helañ-diskelañ*).